

TALABAO

AR GAZETENN A RA TROUZ!

AN HERE ha TALABAO



a ginnig

Rusk ENNAD

TARZHIG

Gwen Aner

e-barzh



AR GWENAN (2)



Un diell gant Martial MENARD, skeudennet gant Alan DIPODE - Sonerezh gant TARZHIG Studioioù Kloitre, mouler e Sant-Tonan, Bro-Leon, Breizh

P. 24



P. 21

Un istr a-reuz...

...HAG EZ EAS DA VERED AL LOUANEZ A OA O SERRIÑ GANT UN TAMM PILH ER SUL-DIGWENER.



A.S. + M.B.

N°3 Mai 1987



20,00L



Niverenn 3
 Miz Mae 1987

TAOLENN

- 3 BOUDIG AN TREDAN
- 13 BBBZZZZHHH!! (2)
- 21 UN ISTR A-REUZ
- 24 KRAS-LAOU
- 26 UR SELL WAR HON ISTOPR
- 30 C'HOARIIT GANT EWEN

D'HOL LENNERIEN

Ne vo ket a GORN AR C'HWEN, siwazh hag allas, en niverenn-mañ: klañv bras eo bet merc'hig hor mignon Pêr ar Steuñv, ha setu n'en deus ket bet amzer da gempenn ha peurlipat roll-urzhioù TALABAO 3... Ma! Mat e vo an traoù evit miz Gouere!

Ra vo pare hor mignonezig ar bu-anañ ar gwellañ! Labourit mat war ho penveg memes-tra.

War-raok, ha tan de'il!

TARZHIG

Tud 'zo ha n'ho peus nemet o selaou pa fell dezho toullañ kaoz ganeoc'h!

HO LIZHIRI

Digant Bazil ZIGEN, eus Frankfurt

Talabao ker,

Plijadur am eus bet o lenn ar gelaouenn, dreist-holl an diell diwar-benn ar gwenan, rak plijout a ra din ar mel hag an holl draoù lipous fardet gant ar gwenan.

Mat e vefe deoc'h kinnig mucoo'h a bennadoù diwar-benn ar boued. Kavout a rit marteze n'eo ket pouezus, met pa vez jedet mat e tremener kalz a amzer bemdez gant ar boued: dijuniñ, ur grampouezhenn pe ziv gant ur volennad chokolad da zek eur, lein, merenn vihan, un nebeud traoù da c'hortoz koan, koan, traoùigoù da grignat a-raok mont da gousket... Kompren a rit?

Ret eo din echuif ma lizher amañ, peder eur eo, ha poent eo din mont da gemer merenn vihan, poazh mat eo ma fladad kaol-go. Spi am eus e lenn un diell a-zoare a-benn nebeut.

Ho lenner feal,

Bazil

TALABAO: kalon digor!

TRESERIEN! SKRIVAGNERIEN!

Poent eo deoc'h dihuniñ!

Sur on emañ bannoù treset ha danevelloù o kousket en ho ti-retennoù! Ha neuze? E-giz-se e vint embannet? Gwelet ho peus petra eo TALABAO, bremañ e ouezit ez eo mat ho labour evit an embann! D'an ti-post 'ta!!

TALABAO

BOUDIG AN TREDAN



Dre fazi Boudig an Tredan ez eo bet troet en hoc'h mignon Loeiza ha Vinsezias! Ret eo dezho mont da Smarts-ar-Mor da gacout Tchetch Fourmaj, ar strobinneller en deus kelennet he micher da Voudig an Tredan. Tremenet eo Loeiza ha Vinsezias dre ar gouel-houarn hud...



Paskal AR MARC'HEG





HA DRE FORZH
BALE
GANT UN HENT
NA GAS
TAMM EBET
DA
SMARTZ-AR-MOR ...

LOEIZA,
ME GRED
OMP
KOLLET

FIN AWAC'H OUT
BET 'VIT CHOAZ
AN HENT · TE
OUIO, MOARVAT,
PETRA OBER
EN UR SEURT
DEGOUEZH

ALIES E VEZ
GOULENNET AN
HENT DIGANT AN
UR VAQUEZ KOZH
... HERVEZ

EVIT DOARE EZE O
BET KASET HOLL
WRAC'HEG AR VRO
DA DI AR RE GOZH

HA SKUIZH
ON AET

'PEUS KET MEZH
LAKAAT HO REOR
LOUS WAR GEIN
KROMM UR VAQUEZ
KOZH ?





BBBZZZZHHH!! 

En niverenn gent hon eus graet anaoudegezh
gant an amprevaned hegarat-se.
Bremañ e vo komzet diwar-benn
an darempredoù etre mab-den hag

AR GWENAN (2)

Ur vicher eo ar gwenanerezh. Hag ur vicher da vat, rak n'eo ket trawalc'h lezel ar gwenan da vont evel ma karont evit a vefe mel o kargañ ar ruskennou traoñ ha krec'h...

Hogen ned eo ket ret bezañ gwenaner a vicher evit kaout mel da zastum. Meur a hini, ur ruskennad ganto en o liorz, a gav o flijadur en ur ober war-dro o gwenan. Hag ur blijadur emsav eo, evel ma vo gwelet, rak arc'hant a c'heller da zastum diwar sevel gwenan.

Ar mel ne vez ket heñvel e pep lec'h, na pell ac'hano. E liv, e vlaz, e fetisted a zo diouzh ar bleunioù ma 'z a ar gwenan da bikotañ. Amañ e Breizh e veze brudet hor mel evit bezañ hini gwinizh-du, rak gwechall e veze gounezet kalz eus an ed-se. Ned eo ket gwir ken bremañ, ha mar fell d'ur gwenaner o defe e wenan gwinizh-du da bikotañ e ranko lakaat ur parkad bennak anezho. Ar mel bleuñv akasia ha bleuñv orañjez a zo e-touesk ar re c'hwekañ, gant ar mel o tont diwar bleuniaoua foenn-Spagn. Hogen kalz a vleuñv all a ro mel mat ivez: ar melchon, ar brug hag holl bleunioùigoù ar maezioù...

A YA! N'EO KET TRAWALC'H CHIGARDIÑ AR GWENAN, RET EO OBER ARC'HANT WAR O CHEIN! LOUSTONI!



BLEUNIOÙ NEVEZ EVIDOC'H HO MEURDED!

BLEUNIOÙ FAOS? HA GOAP A RIT OUZHIMP?

Ar re a ra o micher eus ar gwenanerezh o deus gwenanegi bras, lod anezho gant meur a vil ruskennad. Ne vefe ket moarvat un aes a labour klask diniveriñ ar gwenan o nijellat ha frañval amañ-ahont! Ur wenaneg a lavarer eus stroll an holl ruskennou en deus ur gwenaner.




(ER-MAEZ!)

Dilhad diouzh se e rank kaout ar gwenaner evit ober war-dro e loenedigoù. Rak ar gwenan a flemm! Setu pa 'z a d'ober war o zro e vez gantañ un tog ledan en e benn hag ouzh erien an tog-se ez eus ur mouch, ur seurt rouedenn




stank, da viret ouzh ar gwenan d'e flemmañ. Lod gwenanerien avat n'int ket tamm kizidik ebet war a seblant: mont a reont d'o gwenan war gorf o roched, dichal-kaer ouzh flemmadennoù an amprevaned, evel pa vefe kalet o c'hroc'hen evel lîr!

Pa vez c'hoant gantañ eveshaat a ruskennoù e ra ar gwenaner gant ur mogeder evit pellaat an amprevaned, amzer dezhañ ober e damm labour. Ur seurt boest eo ar mogeder, gant ur menigoù outi. Devet e vez enni delioù pin pe kozh pilhoù da skouer, en doare da gaout ur moged stank ha put. Dont a ra ar moged er-mez dre ar beg. C'hwezhet e vez er ruskenn dre an digor anezhi ha setu badaouet ar gwenan. Ne vo mui d'ar gwenaner nemet o broustañ diwar an tirennoù ha neuze e c'hell ensellet hag-eñ eo stank ar goradoù warno pe daoust ha kreñv eo ar mel enno. Mar bezont karget-barr ha mar bez stank ar goradoù ez eo yac'h ar ruskennad. A-hend-all ez eo sin fall: marteze ez eo marv ar vamm pe c'hoazh ez eus ur c'hleñved bennak oc'h ober e reuz.



Ar mogeder



Ar gweladennoù eveshaat a vez graet div wech da vhanañ: war lost miz Meurzh pe e penn kentañ miz Ebrel da c'houzout e pe stad emañ ar ruskennad, hag an eil en diskar-amzer, pa vez bet dastumet ar mel, da welet ha trawalc'h a bourvezioù o deus ar gwenan da gas ar goañvezh.



TENNAÑ AR MEL

E miz Gouere e vez leun-barr traoñ ar ruskennoù gant ar mel. Ar gwenaner neuze a laka div pe deir ziretenn war-benn ar re all, ar c'halatrez, dindan an doenn. Pa vez bleunioù e-leiz e c'hall ur ruskennad vat degas meur a luriad mel bemdez, ha pep lur vel a zo kement ha miliadoù a vleunioù pikotet.

Buan e vez leuniet an tirennoù nevez. Stankañ a ra ar gwenan warno gant ur gwiskad koar, evit m'en em virfe ar mel. Ur weladenn a roio da c'houzout d'ar gwenaner ez eo deuet ar mare dezhañ da zivelañ ar bruskennoù.

Mogediñ a ra ar ruskennad da gentañ. Un devezh amzer gaer a zibab da ober al labour-se, rak ma vefe arnev ganti e kounnarfe ar gwenan ha flemmañ a rafent didruez! Goude e sav kuit an doenn diwar e ruskenn hag e tenn an tirennoù leun a vel. Ret eo dezhañ o c'has neuze en ul lec'h kloz, rak a-hend-all ec'h adteufe ar gwenan-holl da gemer o mel! Ar bruskennoù-koar a zo en traoñ goradur warno, a vez lezet er ruskenn. Gant ur gontell hag a denn a-walc'h d'ur rozell, tommet en dour berv, e lam ar gwiskad koar a c'holo ar mel.



Neuze e laka an tirennoù e-barzh un ardivink: an divelerez. Un doare bailh eo, gant paneroù e-barzh, a vez renket enno an tirennoù da vezañ divelet. Ar paneroù-se a vez roet tro dezho gant un dornikell, hag an nerzh-digreizañ a zeu diwar an tizh treiñ a laka ar mel da redek eus ar c'hevigoù hag a-hed diabarzh ar bailh. En traoñ ez eus ur c'hog ha drezañ e teu ar mel er-maez. Lezet e vo da bozañ e-pad un devezhioù bennak ha goude-se hepken an hini e vo lakaet e-barzh podoù, prest neuze da vezañ gwerzhet.

Pa vez bet divelet an tirennoù e vezont adlakaet en o flas er ruskennoù. Mar bez ur bloaz mat e vo tu da zastum mel un eil gwech e miz Gwengolo. Met an dro-se e vo ret lezel gant ar gwenan peadra da c'hoañviñ, un tregont lur bennak a vel evit ur ruskennad vat.



AR PEZH A VAT A ZEU DEOMP DIWAR AR GWENAN

Meur a dra vat a c'hall an den tennañ diwar ur ruskennad gwenan, kalz muioc'h eget ma c'hellfed soñjal.

Bez' emañ ar mel da gentañ, evel-just. Met ar mel a zo un danvez hag a zo mat da gant ha mil tra ouzhpenn bezañ ledet war ar bara da goulz lein pe merenn-vihan! Bez' ez eus bet graet gantañ evit sukr e-pad pell amzer, betek ma tizoloas mab-den an doare da dennañ sukr diouzh ar c'horzh-sukr hag ar betarabez. Ha bepred e reer gantañ, rak kalz gwelloc'h eo evit ar yec'hed. Madigoù a reer gantañ evit an nouga da skouer, hag a zo un teuzar evit gwir. Hag ar bara-mel 'ta! Hounnezh a zo ur wastell kozh-bras anezhi: anavezet e oa er Grennamzer. Hon hendadoù-ni, ar Gêlter gwechall, a rae gant ar mel un died hag a oa brudet-bras, ma lavared e oa outi died an Doueoù! Bepred e vez graet eus an evaj-se amañ e Breizh ha reiñ a reer dezhañ an anv a chouchenn pe c'hoazh mez, dourvel, pe chufere... Un evaj evit ar re yaouank ned eo ket avat, rak alkol a zo e-barzh. Lambiget e vez da vont da ober hini-kreñv priziet-bras...

Estreget boued a reer gant ar mel, soavon da skouer hag ivez nouspet seurt louzoù warn-ugent, ha mat-kenañ eo ouzh ar boan-c'houzoug: n'eus ket par d'ur werennad laezh tomm c'hwekaet gant mel evit tremen ar goañv hep tapout arwezh ebet. Ar gouerien n'eus ket keit-se c'hoazh a ouie tennañ mil vad diouzh ar mel evit prederiañ o loened pa vezent klañv ha ne veze ket ret dezho lakaat dont ar milvezeg ken alies ha ma reont bremañ, ar pezh a oa digoustusoc'h dezho un tamm mat!

Met ouzhpenn ar mel a zo mat d'un dra bennak.

Ar c'hoar ivez a zo un danvez prizius, ha gwerzhet e vez kalz keroc'h eget ar mel zoken.

Souezhet e viot marteze o c'houzout n'eus tamm c'hwezh ebet gant ar c'hoar pa vez fardet gant ar gwenan. Ar c'hwezh-vat a zo dezhi a zeu diwar ar propoliz. Ned eo ket mat da zebriñ avat, tamm ebet!



Gwechall e raed gant ar c'hoar evit fardañ goulaoennoù ha piledoù, met bremañ e reer kalz nebeutoc'h gantañ rak sevel a ra da re ger. Gant ar c'hoar eo e reer peadra da lufrañ an arreburi hag ar boteier, en ur veskañ anezhañ gant dour-tour-mantiñ.

Ar pollen, al livrizhenn hag ar propoliz a vez implijet gant an apotiker evit aozañ louzoù da bareañ kleñved pe gleñved. Hag ar propoliz zoken, a vez tennet implij dioutañ evit fardañ toaz-dent.

N'EUS KET UN DRA, E BED URZHIET AR RUSKENNAD, HA NE DALVEZFE KET D'UR VAD BENNAK EVIDOMP!



AMPREVANED TONKET DA VONT DA GET?


Ne veze ket rouez gwechall en em gavout gant un hed-gwenan war ar maeziou. Hag an dud a ouie reizh-mat e oa ar gwenan loenedigoù talvoudus-bras. Bremañ avat ez eus deuet meur a gemm gant ar vuhez war ar maez. Foeslret e vez ar c'hleuzioù dizamant-kaer ouzh ezhommoù an natur. War ar c'hleuzioù-se, dres a-walc'h, e veze kalz a louzaouennoù melus ha peadra da vleuniaoua a gave ar gwenan enno, hep kontañ ar bod a gavent er gwez kleuz da sevel o bruskennoù.



Ouzhpenn-se e veze gounezet plant gwechall hag a oa melus-kenañ evel ar melchon pe ar gwinizh-du. Bremañ e c'hounezer plant all, evel ar maiz da skouer, ha ned eo ket warno e c'hall mont ar gwenan da zastum nektar da fardañ o mel.

Tamm-ha-tamm e nebeuta ar gwenan gouez a gas o buhez en natur evito o-unan. Mar talc'h an traoù da vont evel-henn ne vo mui nemet gwenan 'doñv', pe kentoc'h gwenan desavet gant an den. Hogen ken gwazh all a zo. Gwelet hon eus pegen pouezus e oa ar pollenadur graet gant ar gwenan en ur vleuniaoua. Gant o labour an hini omp gouest da gaout gwez hag a daol frouezh niverus. Mard a niver ar gwenan war zigreskiñ e vo digempouezet an natur, ha seul gwazh a se ne vo ken evidomp-holl. Gwashañ tra evit ar gwenan, ha kalz loenedigoù all, eo al louzeier-dic'hwilañ a vez implijet evit gwareziñ an trevadoù.

Hag evel pa ne vefe ket trawalc'h gant se, setu ma 'z eus deuet gant ar bloavezhioù diwezhañ-mañ un enebour nevez deomp, ar varroa, un akarian anezhañ, da lavaret eo ur seurt kevnidenn munut-munut hag a ra ar brasañ gaou outo, hep ma oufed re vat penaos stourm outañ da gaout an dizober anezhañ...



DIGAREZIT! EMAON A-ZEVRI GANT UNAN BENNAK...

ENEBOURIEN AR GWENAN

Meur a enebour o deus ar gwenan, evel ar braz eus al loened. Met evel ma c'hoar-vez alies eo an den a zo deuet da vezañ an hini gwashañ anezho holl, gant an diskiant m'emañ.



PA LAVARAN DEOC'H!


Hag en natur o deus ar gwenan da dalañ ouzh enebourien all niveruzik a-walc'h. Al laboused, dreist-holl ar gwennili, ne reont ket fae war ar gwenan, kofadoù a rafent ganto kentoc'h. Al logod, pa c'hellont sevel o fri en ur ruskenn,

a ra un dismantr bras en ur zebriñ koar ha mel. Ar merien, a zeu aes-tre a-benn d'en em silañ er ruskenn gant o ment bihan. Ar c'hevrid ivez a bak kalz a wenen en o gwiadoù hag o debriñ a reont goude. An touseg n'eo ket ur fall dezhañ teurel e deod war ur wenenenn, ha floup! set' aze boued kof a-zoare...

Amprevaned all a zo ivez enebourien ar gwenan, evel ar gwesped hag a blij bras ar mel dezho ivez. Lod gwesped ouzhpenn a lazha gwenan da vont d'ober magadur d'o vioù. Ur valafenn, hag a reer ar penn-marv anezhi, a zo ul laerez vras a vel, hi ivez. Al laer-wenan, hag a zo preñvedenn ur valafenn all, a doull riboulioù e-barzh ar c'hoar en ur zebriñ anezhañ. Gaou bras a ra ouzh ar ruskennad evel-se hag a-wechoù zoken e c'hall lakaat ar gwenan da zilezel o ruskenn.

Laou ivez a zeu a-benn da gavout bod war ar gwenan hag ar seurt-se n'int ket yac'husoc'h d'ar gwenan eget na 'z int d'an dud...

N'eo ket dizañjer eta buhez an amprevaned anvet gwenan, hag i koulskoude e-touez ar re brizusañ d'an den. Gwarez a zellezont evit an holl vad a reont.



Gwir pe gaou?

UR GAOUËR
A ZO ACHANON.

GWIR
PE
GAOU?



- 1 - Mervel a ra ur wenenenn he deus flemmet
- 2 - An tadoù-gwenan o deus ur flemm
- 3 - Ar c'hoar a zo mat da zebriñ.
- 4 - Meur a vamm-wenan a zo en ur ruskenn.
- 5 - Ar vamm a vez speriet en aer.
- 6 - Ar gwenan labourerezed a c'hell dozviñ vioù.
- 7 - Gwenan 'zo na vevont ket a-gevret.
- 8 - Ar c'hoar a vez kavet gant ar gwenan en natur.
- 9 - Pa vez re a wenen en ur ruskenn ez a kuit lod anezho.
- 10 - Ar mel eo boued nemetañ ar vamm-wenan.

(DISKOULM & PAJENN 20)

UR C'HRENNLAVAR:

Petra a lavar ar gwenan?


Mar fell deoc'h dastum, kemerit poan!



UN DRO-LAVAR: "reiñ mel d'unan bennak" a zo ober meuleudioù dezhañ.

C'HWI EO DIOTAN ROUE AR BED,
HO MEURDED!

RA VIOT DOUJET DA VIKEN E BRO-WENED,
HO MEURDED!



GER
AR GEDOUR,
MAR PLIJ?

AKARIAN-ed (ak.g.): gouenn kevrid munut arvevat.

LIVRIZHENN (ak.gw): ger nevez evit ar boued fardet gant ar gwenan evit magañ ar mammoù.

KALATREZ (ak.g.): lein ar ruskenn.
DIVELAN (av.): tennañ ar mel eus ar bruskennoù.

MAT. TREMENIT!

GWIR PE GAOU: ar respontoù. (Klaskit c'hoazh a-raok sellet!)

1-Gwir. 2-Gaou. 3-Gaou. 4-Gaou. 5-Gwir. 6-Gwir. 7-Gwir. 8-Gaou. 9-Gwir. 10-Gaou.

Kontit ur poent evit pep respont mat...

9/10 poent: ur mailh war ar gwenanerezh ez oc'h!

Setu kavet ganeoc'h ho micher da zont!

6/8 poent: deuet eo brav a-walc'h ganeoc'h.

Ne viot ket flemmet!

4/5 poent: berr eo an traoù ganeoc'h!


Diwallit d'ho feskinier!

dindan 4 foent: nul nemet kard! Foi warnoc'h!



KENAVO DEOCH,
HO MEURDED,
TRUGAREZ EVIT HO TEGEMER,
KEN HEGARAT, HAG EVIT
AR MEL, AR CHOUCHEM,
AR BARA-MEL IVEZ!
TRUGAREZ DEOCH!

NETRA, NETRA ...
MA GOURCHEMENNOÙ
DA LENNERIEN
TALABAO!



Un istr a-reuz



Ur veilh en un dro e oa ur boue hag e wareg o chom en ur rastell.

Al louanez a blije dezhi falz ar pokou da lagad war he foenn. Met ne veze morse pok ebet a zerec outi.



Unan a oa re heskenne belec he biskoazh...



Unan all a oa re vuan a chome war zek he foenn...



Unan all a oa re baner a sanke he bri e-barzh he choukoue...



Unan all a oa re glanv ne domme ket war he foenn gant an ahel...



Unan all a oa druz hag ar viou-se ne blijent ket d'al louanez.



A et e oa drouz ar boue gant e wareg ne rae ken nemet touellan a-hed an deiz.

un istr gant Marivon Bere

PELIZE E
TIWISKAS
TEVEL UR GEN-
STRINKADENN
EVIT KAVOUT
UNAN MENNAD
BOEST DA ABER
UR POK EVIT
AL LOUANEZ.




Abousit MAT, PE E VOCH DI-
FOENNET! A BUCHAS AR BOUE
D'AR BOKERIEN BOKED ER RAS-
TELL ~

AR PE-SE EN
UR BRENAÑ
GANT AN NAON
A ROGAS GANT
O LABOUS.
HA DROCHAN,
GWRIZTAN...



PERENT HINI A
UN FLASTRE UR
FENOZ NEVEZ
VIOU NEVEZ, BAN-
VEZ NEVEZ, BLIN-
KADURIU NEVEZ.
MET LAER O DOA
LABOUSAT HA
LABOUSAT NE OA
KET KAOUENN
CHOAZH AL LOUA-
NEZ...



HA SETU AR BOKERIEN
DIFOENNET AN TEIL
GOUDE E-GIZ-SE. BELEG AN
DOENN NE DOMMAS NEMET...

...UNAN.



UNAN HA N'EN
DOA KET ROGET
GANT AL LABOUS
CHOAZH...



AR BOUE DIHOLENEKAET A HILLIGAS DEZHAN E
NEC'H DA WAREG A'ENEP D'AR VUOC'H ER RASTELL.

AR POKER
NE OA KET
POD LAMM EBET
A GEMENNAS
UR MELL MOR-
ZHED...



trevadennoù: ALAN LIPS

...HAG EZ EAS DA
VERED AL LOUANEZ
A OA O SERRIN GANT
UN TAMM PILH ER
SUL-DIGWENER...



PEP OBER
PLOUZ
E ROSTAAS AR
POKER OUZH
AL LOUANEZ
NE GLEMME
NETRA



PAG E SKOPAS UN
TAOL MORZHED
PONTUS WAR HE FOENN ~



BRESKIÑ A REAS
STRAKAL UR POZ
DIV VEILH KRASHOC'H
EGET HE FOENN...



SETU GIZE UR POK A-FENT EVIT HO
KWAREG, A LATARAS AR VAOT
AVANK D'AR BOUE. HA KAOUENN EO SUR
-AVAL RAK NE VEZ KET KLEMMET KEN...



PAS ROBO EN-DRO DA
BOUELLAN ROUFIT
UR POK NEVEZ DEZHI
HAG HO PO AR VUOC'H
DA VAT EN HO RASTELL.

AR BOUE
DISTAM-
MET A CHENNAS
ABER WAR-DRO
E DRO...



PAG AR POKER A
ZILEZAS GANT
AR PREUV-SEIZ.
(A'ez yez!)

DANEVELL

GWELET E VEZ a bep seurt tud er bed daonet-mañ. Tud plijus ha displijus. Graet e vez anaoudegezh gant tud 'zo, ha kollet e vezont goude... E-giz-se emañ ar vuhez, evit pep hini ac'hanomp sur a-walc'h! Gwir eo koulskoude ne c'heller ket di-soñjal an holl dud-se: klask a rin kontañ deoc'h piv e oa an Aotrou

KRAS-LAOU...

Un devezh e oan o pourmen er straed, beuzet em soñjoù, met war kostez ar straed, e-tal ur voger leun a skrivadurioù, e welis ur c'hasker-bara eus ar re lousañ, pe da vihanañ unan ne vezer ket kustum da welet e pep lec'h.

C'hwez fall spontus a oa gantañ. En e gichen e oa ur c'hi bihan leun a vlev lous ivez, du pe louet - livioù an die-vez a oa warnañ. O kousket e oa war un tamm sac'h brein e-tal ar paotr kozh. Etre daouarn kreñv an den war un tamm kartoñs e welis ar gerioù-mañ:


Furlukin dilabour
dilezet gant e strollad sirk
Laouen da gregif en-dro gant ur strol-
lad nevez. Gant ma c'hi on barrek
d'ober ur bern traoù.

An den-se a oa sur-mat dilabour abaoe un nebeud mizioù. Gwisket e oa gant dilhad a denne da bilhoù re vihan evitañ, war a seblante. Ur pezh den kreñv e oa koulskoude an den-se, gant ur barv gris ha mourroù du. Bindan un tog gwak du e veze gwelet daoulagad bihan glas ha lemm o luc'hañ.

Da gentañ e voen souezhet-bras. An dud en-dro din a dremene hep teurel ur sell outañ, pe d'an nebeutañ ouzh ar c'hi bihan. Dre ma chomen da sellet outañ e krogas huan ar gaos etrezomp. Eizh miz a oa e oa dilabour ar furlukin!

- Ya va flac'h, a lavare din, diaes eo evit ur furlukin kozh evel don kuitaat ar vicher. Bremañ e hunvrenan bep noz em buhez tremenet, pa veze c'hoazh leun a dud dindan an deltenn vras o stlakañ o daouarn, hag ar vugale o tont da 'm gwelet hag o c'houlenn diganin peseurt studioù a oa ret ober evit dont da vezañ ur furlukin brudet dre ar bed!

'Quien ket petra respont dezho!...



24

Skeudennoù gant Denez PRIJENT hag Alan Dipode

Ar c'hi bihan a zihunas rak ar glav a gouezhe a-bil bremañ. Kinnig a ris d'an Aotrou Kras-Laou dont da evañ ur bannac'h e tavarn "Ar Fortun" a-dal deomp.

- Met c'hwi, Aotrou Kras-Laou, petra e oac'h kustum d'ober gant ho ki a-raok?

- Me? O, pas kalz a dra, ma flac'h! Nemet lakaat tan en ur c'helc'h koad gant paper tro-dro ha Fistoulig da lammat drezañ. Plijout a rae an dro-se d' an dud, me 'lavar deoc'h!

Ar furlukin kozh n'en devoa ket bet amzer da dennañ kuit e dog voulouz du poul-trennek, ma oa azezet ar c'hi bihan war e varlenn, e bavioù a-raok war an daol evel an dud.

Kras-Laou en devoa lonket dija e vane. Sec'hed en devoa ha naon ivez, abaoe an amzer...

- Ha piv a oa c'hoazh en ho strollad sirk? emezon.

- Fidambie! Dimezell, ur bern tud! Un dañserez yaouank a rae bemnoz ur c'hard-eur dañs klasel! Gouest e oa da vale war ur gordenn ha treuziñ an deltenn vras, uhel-uhel e krec'h... Gweñ ha skañv e oa, ha pegen koant... Klevet e veze ur sonadenn vras achantet, un den o seniñ gant an delenn hag unan all gant ur saksell. Gwelet e veze an holl dud o tigeriñ o genoù hag an dimezelled e-touesk an arvesterien o leuskel huchadennoù bihan ur wech an amzer gant an aon o devoa da welet an dañserez o kouezhañ war al leur. Me ne gouezhe morse, betek...

Ar c'hi bihan a selle ouzh e vestr, e benn troet war ar c'hostez, evel p'o devez ar chas c'hoant da ziskouez emaint a galon ganec'h... Daerou a oa o vont da ruilhañ e korn lagad an Aotrou Kras-Laou.

Ha me da baeañ ur banne all d'ar furlukin kozh...



25

Ur sell war hon Istor

Santez Ninnog

BUHEZIOU AN DUD VEUR a zo bet lakaet da "sent" gant ar Vretoned a zesk deomp a bep seurt war marevezh koshañ istor Breizh.

Gwirionez ha mojenn a gaver enno a bep eil, avat, ha n'eo ket aes dispartiañ an eil diouzh eben...




MERC'H d'un tiern, Broc'han e anv, a vro Aberhondu e gevred Kembre, e oa Ninnog. Dre ma oa kristenien he zud e oa bet badezet ha desavet e voe gant he maeron, Gwennarc'hant. Chom a reas gant houmañ betek an oad a benzek vloaz.

Ur plac'hig sioul ha fur e oa Ninnog, war a zo bet skrivet. Troet kenañ e oa d'al labour ha d'ar studi: mont a rae da studiañ an **dornlevrioù** sakr d'ar manati tostañ.

Neuze e teuas mab ur roue a Vro-Skos da c'houlenn anezhi da zimeziñ. **Tro-wenn** a reas hemañ avat rak Ninnog a roas da c'houzout d'he zad ne felle ket dezhi dimeziñ. Graet he doa he soñj mont da **leanez** dre ma oa troet gant ar relijion.

Hag hi goulenn gant he zad plegañ d'he c'hoant: mont kuit eus he bro etrezek Breizh-Vihan, hor Breizh-ni, da **brezek** eno ar relijion gristen.



GWELLOC'H E KAV DONT DA VREIZH EGET DIMEZIN DA VAB UR ROUE A VRO-SKOS?

EVEL-JUST! EVIT KAOUT AMZER DONMOCH'HI!




D'ar mare-se e oa Bretoned a Enez-Vreizh (Breizh-Veur bremañ) o treuziñ ar mor evit divroañ. Dont a raent d'en em ziazezañ e Letavia, an anv kentañ a roas ar Vretoned da Arvorig ("Llydaw" a reer atav e Kembraeg eus hor bro-ni).

Ur rummad kentañ a **zivroerien** a grogas da erruout adalek fin ar bloavezhioù 300. Soudarded e oa al lodenn vrasañ eus ar re-mañ. Galvet e oant bet gant ar Romaned da zifenn **Impalaeriezh** Roma ouzh ar **Varbared**.

Ur eil rummad a zeuas diwezhatoc'h, etre ar bloavezhioù 500 ha 600 dreist-holl. A bep seurt tud a zivroe neuze: labourerien a bep micher evel tud a relijion. Dilezel a rae ar re-mañ Enez-Vreizh e oa ar Saizon oc'h aloubiñ.

Gant an eil rummad-mañ e tegouezhas Ninnog.



SOUDARDED AR VRETONED EN ARMEOÙ ROMA??


YAT! EVEL TONTON JOB A ZO SOUDARD E NOUNEAT!

Aet e oa Ninnog kuit eus Enez-Gembre asembles gant ur bern tud all: "Pevar eskob, ur bochad beleien ha menec'h hag un niver bras a dud all a bep seurt stad". Gwennarc'hant, maeron Ninnog hag he faeron, lesanvet Ilfin, a oa en o zouez ivez.

War 7 lestr e oa bet karget an dud hag o madoù. Listri dre lien e oa ar re-mañ, evel-just, ha gant ar roefoù e vezent lakaet da vont pa vezent o tostaat d'an aod. Un 50 den bennak a oa war pep hini, d'an nebeutañ.

Brav e oa an amzer ha plaen ar mor. Treuzet e voe Mor Breizh en un nebeut devezhioù hag hor morerien da verdeiñ etrezek su ar **c'hourenez!** Dont a rejont d'an aod en ur porzhig war an douar bras, dirak Enez Groe. Anvet e voe "Poull Ilfin" ar porzh-mañ ganto diwar "Ilfin", lesanv paeron Ninnog. War douar parrez Plafvour e oant degouezhet.

Ha bec'h neuze da ziskargañ ar **fred** diouzh al listri!



HA N'EO KET WAR NEVIOÙ-MAEN E TREUZENT AR MOR?

AI PE GANT PLADOÙ-NIJ, MARTEZE!

Tresadennoù gant Alan BIPODE


Mont a rejont da gaout tiern ar vro, Warog e anv. Hemañ a roas gwir dezho da vont da glask a-hed an aod al lec'h a blijje dezho evit ober o annez. Profet e voe dezho, ouzhpenn, 300 boezellad ed ha 300 penn chatal.

Ninnog a yeas da sevel he zi nepell eus al lec'h ma oa deuet d'an aod, war vord ul lenn, en tu all da devinier Plañvour.

Sevel a reas lochennoù eviti hag evit al leanezed all a oa deuet ganti. Un nebeud menec'h a yeas da ziazezañ o manati un tammig pelloc'h.

Bep an tammig e kreskas manati Ninnog gant merc'hed all kavet er vro. Roet e oa bet d'al lec'h an anv a "Lann Ninnog", da lavaret eo manati Ninnog.

Gant an amser eo deuet an anv-mañ da vezañ "Lannenneg". Hisev an deiz, e Lannenneg, ne chom roud ebet ken, 'm eus aon, eus ar manati kosh met ur gêriadenn a zo aze atav war vord al lenn, lenn Lannenneg evel-just. Ha kalz tud



HA SONJAL A RA DIT E YAE AL LEANEZED D'OBEB PLANKEN-DRE-LIEN WAR AL LENN?...

HA PERAK NE LAVAREZ KET D'OBEB PESKETAEREZH DINDAN-VOR?

a zo Ninnog o anv-badez e Plañvour...

Ar manati a oa ennañ un iliz savet e koad war diazezoù mein ha logelloù koad, ul leanez e pep hini anezho. Ur batis bras all a oa e-lec'h ma prede al leanezed asambles. Batisoù all a oa c'hoazh evit ar chatal, ar pourveziou hag all... E-kreiz an holl savadurioù-mañ e oa ar porzh. Ur c'hleuz a oa bet savet tro-dro d'ar manati evit mirout ouzh al loened gouez a dostaat.

Ren a rae al leanezed, un 10 pe ur 15 bennak anezho, ur vuhez rust ha kalet, o vevañ diwar nebeut. Labourat a raent evit kaout o boued. Dont a rae ar venec'h da zifraostañ o douar dezho.

Dont a rae ar re-mañ da lavaret an oferenn ivez. D'ar bedenn e roe al leanezed ul lodenn vras eus o amzer. Dre o skouer vat e felle dezho dedennañ d'ar gredenn nevez, ar relijion gristen, an holl dud er c'hontre.

Rak ar gredenn gelt a wechall ne oa ket bet diskaret da vat d'ar mare-se c'hoazh. Kredif a rae ar Gelted e meur



AL LEANEZED A VEZE TOUZET O BLEV DIRAK DEZHO IVEZ?

TE ED A VO TOUZET DA RE MAR TALC'HEZ DA LAVARET FORZH PETRA !!

a zoue ha traoù sakr e oa evito menezioù 'zo pe feunteunioù 'zo. Kristenaet e voe ar feunteunioù dre sevel un iliz en o c'hichen, hag ar menezioù dre sevel un iliz warno.

Hervez ar vojenn ez eo en un doare burzhudus a-walc'h e vije aet Ninnog e darempred gant Warog, priñs Bro-Éreg. Klevit kentoc'h:

"Un devezh ma oa Warog o chasat e tegouezhas dezhañ tremen e-kichen lann Ninnog. War lerc'h ur c'harv e oa, eñ hag e chas. Hag ar c'harv da zont da glask repu e manati Ninnog pa oa al leanezed war greiz o oferenn.

Ar chas a oa o redek war roudoù al loen kaezh a chomas a-sav krenn dirak an tamm gwazh-dour a rede dirak ar manati. Hini ebet anezho ne grede lammat dreist. E-giz-se seizet e oant ha yudal a raent par ma c'hallent.

Warog, degouezhet eno gant e varc'h-eien, ne gomprens ket petra 'oa peget en e chas... Hag eñ lammat dreist ar wazh ha mont tre d'ar manati da welet.

Nag ur souezhadenn en doe neuze o welet ar c'harv, sona e benn gantañ, e-touez al leanezed a oa o pedif! Lakast e voe an taol-kaer-mañ da **burzhud**: be-



ME 'ZO O VONT D'OBEB UR BURZHUD DIT, IVEZ?

LAKAST UN TAMM SUKR DA ZEVIN, EVEL-JUST! LENNET EM EUS 'LABAD ? IVEZ!

zañ miret ouzh ar chas a dostaat. Ha Warog, evit diskouez e zoujañs ouzh Ninnog, a roas dezhi douaroù parrez Plañvour hag a bep seurt madoù all...

TIERN: an anv a veze roet d'ur priñs e Breizh gwechall.

DORNLEVR: ul levr skrivet gant an darn evel ma oa an holl leurioù a-raok ma oa bet ijinet ar moule-resh.

OBEB TRO-WENN: c'hwitañ war e daol.

LEANEZ: ur plac'h a vev dindan reneresh an Iliz.

PREZEK: displegañ dre gome e petra e ranker kredif hervez ar relijion. Distagañ ur penad kaos war an ton bras.

DIVROER: un den a guita e vro evit mont d'uan all.

IMPALAERIEZH: ur vro pe un toullad brotoù a zo renet gant un impalaer, da lavaret eo ur rener bras.

BARBAR: setu an anv a roe ar Romaned d'ar pobloù na oant ket en o im-

palaeresh.

GOURENEZ: ur beg-douar, mor en-dro dezhañ, ha n'eo ket stag ouzh an douar bras nemet diouzh un tu.

FRED: ar varc'hadoursh a vez war ur vag.

POEZELLAD: ar pezh (war-dro un deklitrad) a ya e-barsh ur boezell, da lavaret eo un endalc'her krannek a veze implijet d'ar mare.

NEV-VAEN: ul lestr bras e maen e-lec'h ma vez lakast boued pe dour evit al loened. Ul **laouer** a reer ivez.

SAKR: a dem d'ar relijion ha da boue.

BURZHUD: un darvoud dreist-ordinal a vez lakast war kont Doue.

C'HOARIÏT GANT...




EWEN

Emañ Ewen an dirouder o tispenn roudoù ur spier a glask gwerzhañ d'ar C'hallaoued sekredoù hor gwellañ chufere...


Kentañ merk an enklask: un divinadell. Ewen en deus komprenet diouzhtu!

Hag anavezout a rit ur c'hastell
Ennañ meur a zimezell
N'int ket holl eus ar jentilañ
Met traoù ar fardont eus ar gwellañ?

Kavet ho peus ivez, evel-just...
Penaos an diaoul ez eo liammet an afer-se gant ar spierezh? Sellit pizh ouzh ar wenanenn-se: bez' ez eus ur c'horrskudennoeg stag ouzh he c'hein!
Emañ ar wenanenn o kas anezhañ d'he ruskenn. A-raok e guzhat er ruskenn ez eo ret dezhi mont da vagañ ar preñveddennoù er c'hefigoù 1 betek 10, o vont eus an eil d'egile dre urzh an niverennoù hag hep troc'hañ an hent bet graet a-raok. Deoc'h da c'hoari!



EVEL PA
NE VEFE KET
TRAWALC'H
DOUGEN POLLEN!





Emañ Ewen o c'hortoz ma teufe ar spier da gemer e gorrskudennoeg. E-keit-se e kas e amzer o c'hoari gant alumetez. Sellit 'ta ouzh al lun mentoniell-mañ:

Pet karrezenn a welit-hu ennañ? Setu peadra d'ho skoazellañ: bez' ez eus
5 karrezenn ur wech tennet 4 ibil-tan
5 karrezenn ur wech tennet 6 ibil-tan
4 c'harrezenn ur wech tennet 8 ibil-tan
3 c'harrezenn ur wech tennet 6 ibil-tan
3 c'harrezenn ur wech tennet 8 ibil-tan
2 garrezenn ur wech tennet 8 ibil-tan.

Ha kavet ho peus an holl anezho?

Setu, da skouer, penaos 'vez kavet 2 garrezenn dre dennañ 8 alumetezenn:



Diwallit! Bez' ez eus un diskoulm all!



Deuet eo ar spier, a-benn ar fin! Paket eo bet ha kordennet buan hag aes gant Ewen. Boullc'hurun! Nac'hañ a ra al lakepod reiñ alc'houez an armel-houarn m'emañ eil lod ar film enni! Un niverenn 5 sifr eo an alc'houez-se. A-raok bezañ jahinet gant Ewen, en deus kinniget e lakaat da zeskiñ TALABAO 1 ha 2 dre envor, setu e asant al lampon da reiñ un nebeud titouroù:

- ampar ha bihanoc'h eget an eil eo ar sifr kentañ.
- daouzek eo hollad an daou sifr kentañ
- an holl sifroù a zo disheñvel
- tu 'zo da rannañ an niverenn dre dri
- hollad en trede sifr hag ar pevare a zo ar c'hentañ
- ar pemvet sifr a zo div wech an trede

Trawalc'h en deus Ewen gant ur vunutenn evit kavout an alc'houez, ha skeiñ a ra diouzhtu war-du an armel-houarn! Setu saveteet sekredoù gwellañ chufere ar vro! Daoust hag-eñ e vijec'h bet gouest d'ober kement-se?

N'eo ket ur vunutenn met daou viz ho peus evit kavout, rak ne vo roet an diskoulmoù deoc'h nemet e TALABAO 4!

Un noz a viz Mae...



LABOUR DORN: troc'hit pe adskrivit ar baperenn amañ-dindan, he c'hargit, kasit anezhi gant ur chekenn 100 Lur da dTALABAO, hag e viot koumanantet evit ur bloaz!

KOUMANANTIT!

Ma c'houmanantit a reot da dTALABAO pa c'houre'hemennan! Ra bado ar c'houmanant:

1 bloavezh (100L) 1 bloavezh, koumanant skoazell (adalek 130L)

ANV _____ Anv bihan _____

Chomlec'h _____

_____ Kêr _____

Amañ lakaet ma chekenn a _____ Lur gall, en anv AN HERE.

TALABAO, embannet gant AN HERE, 16 straed Jules Henriot, Kerdrezeg, 29000 KEMPER. Rener ar gazetenn: Alan DIPODE. Kasit gwerzh ho koumanant da dTALABAO, Hent-dall Kergelenn, 29112 LANDUDAL. 100 Lur ar bloavezh. Koumanant skoazell adalek 130 L. Koumanant evit ar broioù estren: 130L. Chekenn da vezañ karget en anv AN HERE. Diskleriet hervez al lezenn c'hall Mae 1987. Lezenn c'hall 49-956 ar 16-7-49 a-zivout an embannadurioù evit ar yaouankiz. Lakaet er moul e ti gKloitr, mouler e Sant-Tonan, 29220 LANDERNE, Breizh. © AN HERE, 1987.